

ROPARZ BROUDIG

Grand
Red an Dour

Barzaz

ROPARZ BROUDIG

**GAND
RED AN DOUR**

Barzaz

EMBANNADURIOU "EMGLEO BREIZ"

1. · Geriadurig Brezoneg-Galleg ha Galleg-Brezoneg (*Séité-Stéphan*)
2. · L'Orthographe universitaire de la Langue Bretonne (*Falc'hun-Dujardin*)
3. · Komzom, lennom ha skrivom Brezoneg (*J. Tricoire*)
4. · Mil-Pok (Pezig c'hoari en eun arrest) (*J. Noël*)
5. · Seiz Pennad-Lenn
6. · Mojennou Breiz : 1. · Ar Mor (*Pierre Hélias*)
7. · Geotenn ar Werhez (*Jakez Riou*)
8. · Barzonegou (*Reunan ar Mougn*)
9. · Gand Red an Dour (*Roparz Broudig*)
10. · Dasson ur Galon (*Loeiz Herrieu*)
(Evid skoliou Bro-Wened)
11. · An Azennig Bihan (Evid ar vugale)
12. · Textes de Thèmes (*Pierre Trepos*)

DINDAN AR WASK

- Ar Roh Toull (*Jakez Kerrien*)
- Eur Honiklig Boudedeo (Evid ar vugale)
- Deskom Brezoneg (*Séité-Stéphan*)
- Geriadurig Brehoneg-Galleg ha Galleg-Brehoneg (*Bernier-Mahuas*)
(Evid skoliou Bro-Wened)
- Bilzig (*Fanch al Lay*)

" EMGLEO BREIZ "

B. P. 17 - BREST - C. C. P. 380-96 RENNES

Gwironez ' zo
N'eo tamm gwironez :
N'eus gaou gwirroh.

Ar pennverdead

Dicheg hag amjestr
A gerz d'an argad,

A zell ouz e lestr

Gand télder ha lorb
Er mor dirollet.

Ha penneg 'vel roh,

War eun hent kollet
Didud, didremen,

Ez an 'vel eur vag,

Bete didermen
Eur porz a hoanag.

Ne vern barn an dud...

N'on ket en imor :
An digenvez hud
A vag Barz ar mor.

Petra vo laret

Da heul ar barrad ?
Daboust e vo meulet
Ar mestr, pe ar vag?...

Roparz, paour kêz den...
Darn a varn hebken
Ouz beg da fri hir
Da harmou ker gwir,
Darn all a gomz klak,
Heb peur na perag,
Euz da dro tramor,
Nebeud tre gand gor
A lenno da skrid ;
Bremañ mar fell dit
Gouzoud o meno,
Den n'henn disklerio...

BAG HEB ENE

En didermen e weñv eur vag
War an donvor he gouel distag.

Pe diaraog ? Eun enezenn ?...
Avel a-benn dreist ar wazenn ?...

Evid c'hoarzin, ar mor a dag,
Hag an avel a dro ar vag.

Flastret al lestr gand ar gourlenn,
Ene heb youl, sed da lodenn...

Gwazenn = Brehenn-vor etre an aot hag an inizi
Gourlenn = Mor leun = Linenn uhella al lano en aot
Kas eur vag d'ar gourlenn = Kas war ar zeh.

DEVEZ TEÑVAL

Hirie ne vo kreisteiz :
 Mouzet e chom an deiz.
 Soucha a ra an dud ;
 Soubla ra Kornog yud :
 Sulvez yen bete noz;
 Disliou peb koumm, peb roz.

A-hed ar porz glaveg
 An tavarniou toupeg
 Leun a zafar diroll
 Ar studierien a-stroll;
 Hogozig tud a vor,
 Mann ebed en o zor,
 Kanfarded evid c'hoaz,
 Dichalet gand arhoaz.
 Moged teo leiz ar zal
 N'o mir ket da zañsal,
 Ha yao d'ar zonerez
 E barr al levenez...

Eur paotr braz ha yaouank
 E votou leun a 'fank,
 Stouet hag hiraezet
 'vel tanvouezenn freuzet,
 A dreuz lehid an aot
 Etrezeg an tornaot.

Eno, heb goud dezañ
 En avel o c'hwezañ
 Er hoad a-uz d'e benn,
 E krog en orroudenn
 A bign da dour Kerroh.

E dal, neuze, gand lorph,
 A zav war-du Gwilbenn
 Beteg ar Porz-Seven,
 Glaz dour e zaoulagad
 War ar mor en argad
 O hlazi er pellider
 Gloazet en e hlazder.

Renet gand droug-hirnez,
 Kollet peb mennerez,
 Ouz troad eur wezenn goz
 En em astenn digaoz
 Gond e galon feal
 Mantret gand ar re all,
 Rannet, flastret, ha skuiz.

Amañ, hervez ar hiz,
 E teue war al lann
 Araog mond d'an Island,
 Ar pesketaer tonket
 Gond e vuia-karet.
 Hogen, e-unan-penn
 Emañ war an dorgenn.
 N'eus na muia-karet
 Na tud na loen ebed.

An oabl war Borz-Lazo
A voug an hekleo.
Heulia a ra e huñvre
A ya gand an dazre,
Du-hont, 'vel eur morvil.

Heuget ouz spered vil
E genseurted a dro
Gand merhed ken hedro,
Er mare-mañ, er porz,
D'e veno, mouez ar horz
O trouzal skourjezet
'dalv eur « jazz » dilostet
A wigour hag a youh
Eun doare « java » bouh.

War vrug al lann, didrouz,
Hag ar vroenenn rouz,
Dizant en avel bud
Bale 'ra prim ha mud.

Gand e hoant ankeniuz,
'vel ar mén gwalleüruz,
Mond a ra, dont a ra,
'n eur zoñjal memes tra.

Strizenn dour ar wazenn,
Evel eun enkrezenn,
'n em stlej war al lehid :
Skrij an tre moug, heb trid.

Hag ar mor en e bez
'n em guz sourret gand mez
Dindan eur vorenn-stign
A ziskenn hag a bign.

Hag eñ da jom aze
Loosket gand an dazre,
Dres evel koz bigi
Karget a hwervoni...

Diskleriedur : Sulvez goañv evid studerierien ar Skol
Verdeadurez Pempoull a zo eun devez a hastaouerez. Eva,
dañsal ha merheta, setu diverr-amzer an darn vuia. Hogen
e teuer da vez a heuget diouz an ebatou-ze.

AR MOR A ZO DIT

Va hred, o moraer,
Pa sked da zizesper,
Va hred em hanaouenn,
Ha sur e vi laouen.

N'eus mann war en douar
A 'frealz ar glahar :
N'eus nemed digenvez
E-touez an dud pa 'z ez.

En dro d'ar bed c red,
Arvest ouz ar stered,
Sell ouz an heol er vann,
Sell ouz al loar e kann.

Perag an dihoanag ?
Dreist an tonnou da vag
A ruilh heb gwanadenn :
Gra 'velti, kerz a-denn.

Ar mor en e splannder,
Gwelloh 'ged an amzer,
Gwelloh eged merhed,
'bareo da gleñved.

EN DRO

N'em-eus nemed eur 'hoant
Hirvoud gwan an hirnez :
Loha diouz an enez
Am zag gand he zasmant.

Hun eur pellgent klouar,
Sked, skeud, ha koun a steuz,
Bete krommenn he diweuz
Mouzet war an douar.

Eun êzenn vor êzet
Va bount didrouz ha reiz
War-du gwalar ha Breiz,
Leh 'm oa he dilezet...

Diskleriadur : 'n eur zistrei
Euz Bourbon
An « doudou »
D'an douar
' zo manet,
Ha kemmet,
Dislivet
Em spered,
Tamm ha tamm
Da rei leh
D'eun dreñv all
Gwenn ha mistr.
A-dreñv
Paour kêz
Doudou !...

ORG H2

HENT AR VUHEZ

Soñjet em-eus pell
 A-hed an novez
 Er 'hoant a rodell
 En dro d'am skuiznez.

C'hoant têr ha dister
 Eur garantez vlin
 War ribl al Leger
 A hoarz kel lirzin.

Klevet em-eus doo
 Em halon a-benn :
 Trouz he botez fao
 E traõñ ar zaonenn...

He gwelet em-eus
 Da bardon gouel kér,
 Ha war he diweuz
 'm-eus laeret he ger...

En he daoulagad
 'vel al loar el lenn,
 Skede va eurjad,
 Ha me da gelenn.

Ha bremañ gand lor
 Ez an drant eüruz
 Da vale war vor
 Er reter luhuz...

En-dro pa zeuin
 A-benn en avel,
 Eur wreg a gavin
 E Breiz o sevel...

NIVLENN

War-du Sterenn
E-méz ar porz kaset er froud,
Laosk ha dibrenn
Va bag a red hag a ziroud.

Avel uhel
Ha takenn 'bed euz ar Hornog;
Glizenn izel
Hag ar gweled a steuz a-raog.

Setu nivlenn :
Na trouz en dour, na mör-avel;
Evel eul lenn
En em astenn en diabell.

Euz ar Mervent
Eun êzenn delt, ha yen, ha mud,
En on skevent
A zeu gand c'hwez ar bezin pud.

Eur hloh ahont
Blankig a dint hag a vousklemm
D'an Aanaon.
An heol a dro, ha mann ne gemm.

Hag hi, direiz,
Ar vorenn deo he gouel diboull,
Evel he 'freiz
'hoari ganeom he zoull didoull.

En on hichen
Eun tamm pellkas a zeu war-benn
Hag a dremen
En eur houleñn eun overenn.

Stign al liñsel
En em ziwri a-nebeudou :
Ar mor a-bell
A ginkl an aot gand bravigou.

Med ar herreg...
'maint stok er vag !... Laosk da zougen
Ha mond herreg,
N'eo ket termal, med kas da benn !

AVEL GORNOG

Selaouit oll
 Argad ha reuz 'n avel diroll :
 Ar Hornog braz
 A skrij an êr 'dal Beg ar Raz...

Nerz dishual
 A zo dezoñ : Diwall... Diwall...
 Ar Hornog braz ;
 Ar bed a gren 'dal Beg ar Raz...

Mestr galloudeg
 D'ar sez Avel, têr ha dicheg,
 Ar Hornog braz
 N'eus ket e bar 'dal Beg ar Raz...

E spered hud
 A yud, a groz, a youh, a hud,
 Ar Hornog braz,
 E hwez a ya 'dal Beg ar Raz...

Lonker stered,
 Er fok bihan e lusk bepred
 Ar Hornog braz ;
 Ar mor a spoum war Veg ar Raz...

Hag ar hoodou
 Diwiziennet a dorkadou,
 Ar Hornog braz
 O lez da glemm 'dal Beg ar Raz...

Spered ar Vro
 Adsav ennom neuze beb tro
 Gand Kornog braz
 War beulvanou 'dal Beg ar Raz...

Hag Eñ bepred,
 'kerz ar goañv, 'korn an oaled,
 Ar Hornog braz,
 Red e gleved 'dal Beg ar Raz...

Avel on Breiz
 En he hastell war venez kreiz,
 Ar Hornog braz,
 Red e weled 'dal Beg ar Raz...

War Benn-ar-Bed, pa zeu goustad
 C'hweg e 'flourad
 Ar Hornog braz
 'trezeg Sav-Heol 'dal Beg ar Raz...

Koun tremenet,
 Kad, kann, kurun, lusk ha luhed,
 Ar Hornog braz
 A hwez deom c'hoaz 'dal Beg ar Raz...

Laoskom neuze,
 Tud disheret, klemm on ene
 Er Hornog braz
 'vid ar bed oll 'dal Beg ar Raz...

BEURE LAOUEN

En oabl sklêr ar houmoul a deh,
Ezetoh emañ da galon
Ha da dreid skañvoh eged deh,
war an hent 'vel eur ravaïlhon.

En êr splann an evn a richan,
Ar wazig a lamm 'mesk al lann,
Laouen on 'vel al laouenan ;
Glaz an neñv 'dreuz eur gohenn kann.

Ar hleier a hoari brañsell
Hag an toaz a boaz en ti-forn,
An arne a zo eet da bell,
Hag on daou en hent dorn ha dorn.

**War zigarez ez eo kuzet an heol
Arabad kredi ne zispako ken.
Abalamour ma 'z eo kousket ar vro,
N'it ket da gredi ez eo tremenet.**

A-hont eo koulz bremañ, e kuñvded ar pardaez,
Koulz ar bedenn geltieg a zav euz an douar
Gand he son kevrineg 'vel eun diougan hud.
A-hont eo koulz bremañ : Ahann e klevan mad
Mouez ar hleier sklintin
A halv gand ar huz-heol
A ziwar peb krehien
Ar houer dilerhiet.

A-hont eo koulz bremañ war grugell Taliesin,
Koulz ar housk dizammet d'ar re a vev hualet
War beiou dilezet ar gadourien veur-ze
O-deus greet Arvorig : Ahann e klevan sklêr
Mouez ar reier en aot
A strak a bezin kraz;
Mouez ar horz er zaonenn
A zarah en ézenn.

A-hont eo koulz bremañ, a-hed ar hleuz lanneg,
Koulz an ehan peohuz, ehon ha mud ha kri,
Ha kri pa skrij ar gwad e gwaziad ar gwaz
A venn stourm evid c'hoaz : Ahann e klevan splann
Mouez ar chatal en hent
Bleniet gand ar mesaer
A zon skiltruz ha gouez
En e vombard gisten.

A-hont eo koulz bremañ, ha me da jom amañ
Pa gouez an noz war Vreiz a drid gand ar hoanag,
Ha me da gaoud enkrez da vez a dihalloù
Warhoaz pa zihuno : Ahann e klevan c'hoaz
Mouez ar mor en dazre
Pa flouza d'an drézenn
'n eur hortoz al lano
A zeulio d'an daoulamm.

Ised ne vezet os se gourzhañ tov
nef eñiget en heng kouerda
ouez ha tanvez os e'nez amzerzhed
dument os zo ibong ul yez illid

Kichen Dezig ar Rouz a zo
kichen dezig a zo kichen dezig a zo
kichen dezig a zo kichen dezig a zo
kichen dezig a zo kichen dezig a zo

E-KICHEN DEZIG AR ROUZ

Na ped gwech 'm-eus touet
'kichen Dezig ar Rouz, va oll vuia-karet,
Chom sioul en diwez,
Paouez da verdei, rei dezi va buhez...

Ha dirag he gwanded
Am lakaé nehét, neuze gand tenered
Me 'lare: « Deuz, kêzig,
Deom d'an overenn-bred, echu eo bihanig ».

Ni do vond d'an iliz
Dre douez ar hadoriou reizet hervez ar hiz,
Betez eur horn teñval
Gand gwerinier skeduz o c'hoari war he zol...

Soñjal 'ree va eñvor,
Evel eun huñvre pell, e oa teuzet ar mor.
Amañ e felle din
Dibab e Bro-Dreger dousig da zimezi.

En dro d'ar goueliou hañv
Ar garantez en hent a ziwaned dizav.
Me 'gomze dizoursi
E brezoneg Leon, hogoz kerkoulz hag hi.

A-uz d'ar bezin-red
Bleo hir Dahud-Morgan, en aot a-hed a-hed,
'vel eun askell digor,
Gand al lano lohuz, luske on spi er mor.

Eet on a-roog... Siwaz...
Heb gouzoud, an deiz-se, va lien a hwezas...
Dezig gêz, eur bedenn...
Rag mar deo mestr ar mor, ez out va steredenn...

LABOUS-PER

O verdei ez aan e-bourz lestr an Ankou
 A veze greet outañ « René-Moreux - Kokouz »,
 Ha war levr va buhez, dazond eun eil gevrenn
 E felle din skriva : Laouen edon a-grenn.

Hogen, eur gorventenn, siwaz, gwasa darvoud,
 A gouezas en dro deom. Mouez kañvuz ar horn-boud
 A helle klemm sikour 'dreuz safar an avel,
 Kristen ne responte; bag ebed en drewwel.

An heol bemdez warnom, tro ha tro gand sour bil,
 Rod ar bed 'vel sac'het e-kreiz ar goabren vil,
 On laoske dinerzet. Kuit on spi en amzer;
 Hag evid sour ha boued e furched en aner.

War vourz ar vag skalfet, ar habiten chalet
 A vutune didrouz, hurenneq ha kaled.
 Hag ar voraerien, diehan war evez,
 Ouz ar mor a zelle da beb eur an devez.

Ha kaset digaset dibaouez war an donn
 Gand ar berniou feulzet a zirede a-gronn,
 Morenn, arne, rugenn, avel viz pe reter,
 Sed a bade on stad abaoe pell amzer.

Hogen, p'edon nehet, droug ha krizet va zal,
 Ha padal o pedi, dre eun novez teñval,
 Setu ma tegouezas, evid gouel Nedeleg,
 D'eul labous tremeniad d'am lomber skei e veg.

Eul Labous-Pèr e oa, daoulagad kouralenn,
 Houpet e bluenn gwenn, hourzet er yenijenn,
 Hag a zelle ouzin da houllenn gand truez...
 Eur repu d'e gèznez. Eun evn em digenvez...

Da devel e zienez, me neuze d'e gemer,
 Pa gomzas dirazon eur yez rust ha tener,
 Ar brezoneg heson deuet euz penn ar bed,
 A floure d'am halon 'vel eur gouestl en neved.

Va Labous-Pèr avad, ne dlee chom em zi :
 Ar hannad askelleg e-noa e gefridi,
 Rag ene va henderv a zouge d'an Neñvou;
 Ha pell e nijas kuit gand pouezad va daerou.

Me larvar deoh tudou hag am lenn amgredig,
 Krenidig en eur zond d'am bro henidig
 E klevis e varvas va har e Montroulez
 Pa gase va labous e ene d'an êlez.

TAN SANTEZ KLERA

E-keid ma laosk ar stur e roudenn vordaneg
Gand marmor houleneg, war lein ramp ar mor du,
A daol trumm a-wechou, ouz troad ar wern e trid
Al levier lor en noz war an aroz didu.

'vel eur houlaouenn goar dindan ar volz diloar,
Ouz beg ar wern vizan e tarz eun tan marzuz,
Arwez Santez Klera, sklér ha skrijuz ha gouez,
'vel eur goulou naved 'barz eun iliz divent.

Petra eo va Doue ?... emezañ pennfollet...
'n eur ober sin ar groaz, krenidig e grohenn,
E tiskenn an harzell daved e gabiten
Ha na spurmant, siwaz, tasman ebed en neh.

" Petra 'hoarvez ganit, mezv ez out pe gousket ?
Ne welan tra, va 'faotr; lavar din Yann Lommig,
Peseurt tan, mil gurun, az-peus gwelet aze ",
A hrozmol mestr al lestr, onkeniet koulskoude.

--Salokras, kabiten, gwelet em-eus heb mar
Eur pez tamm tan divlamm, hag a flamme, m'henn goar...
N'on ket mezevellet na mezviet na kousket,
Hag e touan zoken, heñvel ouz tan bered... »

Ha divizet e oe diwar ze pell amzer
E penn a-raog ar vag, kent mond d'o 'fled divlod,
Gand ar vartoloded bodet en o hombod,
Diwar-benn an Ankou, tad an tan en noz du.

An avel antronoz, eur Gwalarn didrugar,
Gand eur mor dirollet diredet war eun dro,
A skubas an teir-gwern, e bakas, ha d'ar strad.
Beteg an diweza, an oll a oe beuzet.

KIMIAD

War-raog, war-raog...
 Ha kuit war vor
 Gand va 'hoant têr
 Ha kuit war vor
 War-raog, war-raog...

Allaz, allaz,
 A-hont er vro
 E chom va spi
 A-hont er vro
 Allaz, allaz...

Nag aliez
 Muia-karet
 Ez on bet droug
 Muia-karet
 Nag aliez

Ha koulskoude
 'm-eus ranngalon
 Dirag da zoan
 'm-eus ranngalon
 Ya, koulskoude...

War vourz da vag
 Sav d'an avel
 Da benn uhel
 Sav en avel
 A-red da vag...

Donvor bepred
 Lusk va buhez
 Er bed o-bez
 Hag am dilez
 En aot o-hed...

Abred, abred,
 A-raog an ed
 A-raog an eost
 Ha ken prestig
 Hag an eostig...

Arad a ra
 An eor en erv
 Kimiad d'an oll
 Ha kenavo :
 Aveli ' ra...

BAG AN ANAON

Enezenn ar hant reuz
En em steuz war vor du
En dremmwel va eñvor
Leh ma tro euz eun teuz.

Eur garnel vorel eo
Leh ma kousk ar skeudou
Mordoenn ar re skuiz
Diniver ha dizanv.

Kouh eur vag izvoret
A vale 'vel pellkas
'n eur skeja gand e staon
Hent teñval al listri.

Arched braz an Ankou
A hirvoud en e greiz
Eneou ar hondon
Glaharuz er reklom.

Peñseidi dinouet
A gantren gand anken
En eur steud kañvaouüz
'n eur houlenn gwalih o stad.

Mond a ri, moraer,
Te iveau, marteze,
Eun devez, diabell
Ha didud en o mesk...

Dalh truez, moraer,
Ha lavar evito,
Trugarez d'az kalon,
Ar bedenn a ouzout...

Enezenn ar hant reuz
En em steuz war vor du
En dremmwel va eñvor
Leh ma tro euz eun teuz.

BARRAD AVEL

Tonnou du an arne ' deus livet an oabl sklér,
Ha ne weler bremañ 'med islonk ha moger.
Pelloh pell er heinvor, evel trouz ar brezel,
Tarzadeg ar hurun ' vez klevet o verval.

En em zispak an neñv en amzer o tremen :
Eur vaquez ' deus leñvet : war he dremm digempenn
Mouzet eo bet he c'hoarz, med preder he hened
Buan he fak endro ; kuit an doan er moged.

Kannet eo ar houmoul gand an aveliou kuñv,
Hag al lostou-kezeg a gerz a-red war neuñv.
An heol a bar warnom eur bann madelezuz,
Hag ar goueliou a stou war an donn didrehuz.

Eur hlaisted nevezet a dreuz an du a deh,
Hag ar vuhez dre-oll a strink, a drell, a dreh ;
An dremmwel lugernuz a beurgrib e voue,
Hag an deiz war ar bed a sked e gwir roue.

A-ZIWAR WEL

Digoun war an donn amlivet
'vel eur voualh vor en avel,
Al lestr amjestr ha digabestr
A zigor eun hent loveüz.

Da heul an heol e-pad an deiz
Da heul al loar pa zeu an noz,
Ar rod a zent ouz an nadoz,
Hag ar stered a veilh e red.

Seder ha pell euz an aot gell,
Er rugenn ruz hag er halm gwenn,
Don eo va hun, glaz va huñvre;
Gwir levenez an digenvez...

VA HUÑVRE

Al loman ha mestr o levia al lestr
 A zalh don al lorh en e galon balh;
 Med pa fell dezañ, ne hell gouziza
 Mar deo red tostoh, sevel en avel :

Trehet eo e lorh, e zizalh brohet,
 Ha gand mall d'e bal, didamall e kerz.

Ha war an aroz, ar rod-stur en dorn,
 E soñjan bremañ en eur vag vihan,
 Divoged he dreñm ha lemmet he staon,
 Didrubiilh he zud, digur ha divrud.

Houmañ ' zo divent, hag a zarempred
 Memes hent er gwent en heveleb red,
 A-benn hag a-dreuz, a-denn e vins-tro,
 'vel eun ounner-vor, pounner ha sammet.

Va bag-me
 A vo skañv, sklêr ha sklint
 War vor sklent
 E suhenn ar rugenn.

Na kempenn,
 Don he hein, pa vo sko
 Ha skoret
 Gond he skoaz ouz ar hae...

Va bag-me,
 Doñvaer en donvor,
 A vo sklav,
 Koadou kamm sklat 'vel skant.

Hag en dro
 El lano
 Klenk en hent
 Mor divent.

Na tamall
 Da ziwall,
 Nag avel
 D'on herzel.
 D'an douar
 Gond al loar,
 Hag eur poz
 Deut an noz
 E bered
 Ar stered...

Pa rin eur paouez
 Aberiou nevez
 O doureier lor
 ' roio din digor,
 Hag en inizi
 E klaskin bili
 Da farda kevell
 Hag eun tamm andell.

Heh askell a gavo gwarez eun oufig gwenn
En bod ar bokued, ouz troad eur roz lanneg.
Ha diouz ar beure glaz, 'hed ar wenodenn wan
A ziskenn en tornaat dre douez ar bodou brug,
E verzin va bag-me, gwintet he gwern uhel,
E traoñ an drêzenn voug o tridal d'al lano.

Herreg war ar hae rikl, e-strap ar botou koad,
E sachin va hanod, ha war vole d'am bag.

A-veh em bourz dineh, an delez mistr en neh;
Hag an heol alaouret e tarz e vann kenta,
Em daouarn kaledet lako kerdin arhant,
Ha war al lien gell lorh eun allazig ruz.

Savet an eor er-mêz, riblet, stegnet ar fok,
Neuze, 'n eur drei he staon, stouet dindan avel,
Skañv e kemero herr en êzenn douar delt.

Hag ar varrenn dibrenn, va horn o vogedi,
En eur dremen ar hae e tapin em divreh
Korv yaouank va 'fried, tener ha fresk ha bresk,
Hag a lakin a-blén 'touez ar herdin glizeg
O c'hwez a ganab kreñv mesket gand an têr du.

Evel-se ' vefom tri,
Tri en heveleb hent.
Diouz spered ' vefom daou,
Ha daou dre goun an traou.
Unan gand kefridi,
Unan 'vel diagent...

**BRUD A YA...
POAN NE RA...**

Marvet ar habiten, gourvezet er gourlenn...
Mignon va yaouankiz en douar don fetiz...
Marvet va helennner, marvet ar habiten,
Va eontr ken didro. Nag anken, kenvroiz...

Reisoh 'm-eus ket gwelet, ha gwelloh ne oa ket.
Pell diouzin, pell a-hont, da deuzi er hondon,
An den a zo diouz red da viken diskennet :
Kollet eo va mignon, ha rannet va halon...

Kaset ' oe da verval er brezel kasaüz
Evel va zad gwechall, ezel ar brezel all.
Marvet eo, marvet int, mibien ar mor trelluz.
Ni bremañ 'vel chatal, diavarvel d'an dichal...

SON AR PAOTR DILEZET

Pebez enkre... Fall an devez...
 Didud, divrud, ar strêdou striz.
 E kér Malo ' ver o houzañ :
 Gloaz ha gloan, glizenn goañv,
 En e greñvleh ar Zant a gren :
 Eun hir a gousk na ya da zen.

--Ha mond a rit, en abardaez,
 Ha mond a rit c'hwi da zañsal,
 Ma n'oh emberr na skuiz na fêz ?
 Rag n'em-eus me na c'hoant na pal.

Eñ, paotr seder, e ano Pèr.
 Hi, gwir goantenn,
 A zo anvet Fina Junter.
 (Bleunienn dispar a yaouankiz...)

Med ar plachig ' deus laret nann :
 Fina Junter he-deus nahet.
 --Gast... eme Bèr, se ne ra mann :
 Unan kollet, unan kavet.

Hag eñ da vond war bali-tro
 Ar voger-greñv gand poan galon,
 Teir gwech en dro da Zant Malo
 Gand poan ehon 'vel ar mor don.

Diou verh neuze ' gejas gantañ.
 --Deuit ganeom, Aotrou Penn-Fall...
 --Nann, ganeoh c'hwi n'in ket bremañ;
 E gwirionez, ket da zañsal.

--Rag se, Aotrou, p'oh prederiet,
 Ni ' zo veldoh chalet iveau.
 Hastom eta, oll a-gevred
 Da glask on leh el levenez...

--Va leh-me lor ' zo war ar mor;
 Ganeoh ez in beteg an nor ;
 Hoh anneze-c'hwi, el levenez;
 Ne gomzom ket heveleb yez.

Rag ho toull-c'hwi ' zo 'barz ar bed;
 Kerzit eta, diou logodenn
 Daved ho pal : bod ar vered;
 E don ar mor eo va lodenn...

EUN ENEZENN ER MOR

N'ouzon dare petra skrivan.
N'ouzon muioh petra vennan.
Goullo da vad eo va ene,
Goullo da vad a garante.

Na spi, na feiz, na gwir, na reiz,
N'hello kemma biken em hreiz
Stad va spered rag stad ar bed :
Na gour na dir, poan na kened.

Reou all ives, war beb tachenn,
Keid all ha me, en o hichen,
O-deus stourmet e-touez an dud,
Bremañ beuzet, bouzar ha mud.

D'an oll re-ze, n'eus mann 'vito,
Tud divroet e-barz o bro,
Tud huiolet hag harluet,
Tud kabestret ha pennasket.

Nemed an urz ma 'z int bleniet,
Renet da heul en o spered
Mennerez yud ar bobl chatal
A gri, a youh, a skrij he zal.

Nevez-amzer ar peurbad
A zo c'hoaz pell 'kreiz an argad;
Tud foll diroll ' gas d'an argoll
An tamm spered a jom d'an oll.

Siwaz deom-ni, mar n'om ket kreñv,
Sellom da vad war-zu an Neñv.
Klaskom amañ eul liamm breuriez
P'emañ 'r galon leh 'mañ ar yez.

Skoulmet gwechall gand ar zent koz,
Kollet eo bet e-pad an noz,
Med al liamm-ze ' starto warhoaz :
Arzur kousket ' zihuno c'hoaz.

Ar hleze dir daouhanteret,
N'eus forz biken ' vo douaret :
Eur vro hebken ' jom d'ar vreudeur,
Eur vro tramor 'vidom neizeur.

Enni ' vevas on gourdado,
Enni warhoaz ' vo dizolo
Gwir gerentiez dianvezet :
Deom 'ta dezi, pobl disheret !

Iwerzon hlez, Iwerzon hlan,
Klevit on galv, klevit on han :
On Breiz nevez, Keltia, Neved,
' zastum 'hanom oll a-gevred.

Gouenn tonket ar gaouenn-gaz,
Uhel da benn, treuz ar mor braz;
Barrad en aot d'ar reverzi :
Euz' an tu all emañ da spi...

AR BEZINA

Evel bleo Molenez, en avel an enez,
Bezinou beo melen, beruz en tre beure,
War o herreg a-led a hortoz al lano :
Bezin troh stank ha dru, sklok ha tor ha jelmez.

Ar vag a jom a-zav, hag he staon lemm a dav
Skoret en eur poull trêz, sko diouz red, dihoul frêz,
A-stok eun eost morel a bok ar garreg gell;
Beh d'al laz : nao baotr garv gand o 'falz en o 'fav

Ferhier ha filzier lemm a wigour hag a douz.
Andelli, savadelli, dalhmad o hravazata;
Setu kouchet ar vag, hag ar vein rust mezuz
A ziwad o 'fenn ruz, kribet ha moal kakouz.

Ha gand he harg pounner, ar vag a-rez an dour
A houleñn d'al lano d'he has er gourlenn leun
Daved ar porz sioul 'vel eul lenn diavel,
Tra ma kuz an heol ruz e lagad an treizour.

IMPRIMERIE
JOSSIER-HAMON
MORLAIX